

Evit ar familhoù gant bugaligoù ha bugale, hag evit an dud deuet
Deut da vevañ e brezhoneg e-pad un dibenn-sizhun !



Brezhoneg er familhoù

un dibenn-sizhun
e brezhoneg
e bro-Dreger

5-6-7 a viz Ebrel 2024

lojeiz ha tachenn-gampiñ



bef@keav.bzh



Titouroù + enskrivadurioù :

bef@keav.bzh
06 22 53 13 21


<https://www.keav.bzh/stajou/brezhoneg-er-familhou>

Gant souten :



Dibenn-sizhun e brezhoneg evit ar familhoù hag an dud gour a zeuio hep bugel

Kinniget e vo da bep hini kemer perzh er mont-en-dro.



Priz an dibenn-sizhun

- **Predoù:** dijuni, merenn & koan ar Sadorn, dijuni & merenn ar Sul.
- **Bod** ar Gwener hag ar Sadorn noz: lojañ a refet en un ti-vakañsoù (75 plas) pe war un dachennig-kampiñ gant ho teltenn / karavanenn / karr-kampiñ (20 plas) ...
5 mun war droad emañ an dachenn-kampiñ eus ar greizenn-vakañsoù.

Da zegas : piknik ar Gwener noz, ar gwin evet ouzh taol.

Resisaet e vo deoc'h an dafar da zegas pa vo kadarnaet ho enskrivadur.

Priz digresket pe prizioù all, deuit e darempred ganeomp.

Ur skodenn-vloaziek a 5€ a vo goulennet digant pep den gour evit bezañ ezel eus KEAV.

Prizioù ar staj	Ti-vakañsoù	Tachenn-gampiñ
Den gour	106,00 €	63,00 €
Bugel (etre 2 ha 12 vloaz)	84,00 €	51,00 €
Adalek an eil bugel	56,00 €	35,00 €
Bugel (dindan 2 vloaz)	0,00 €	0,00 €

Plijadur a vo e brezhoneg gant ar re vihan hag ar re vras !



trekeltiek

rezhonegerion

Gwener 5, Sadorn 6 ha Sul 7 a viz EBREL 2024

e PORZH-GWENN PERWENAN

kreizenn-vakañsoù **PORZH-GWENN**

PAPERENN-ENSKRIVAÑ

Da gas **a-raok ar 27/03/23** :

dre bostel: bef@keav.bzh

pe dre lizher: Faned Labbay (KEAV);

11 imp/ hent-dall Kerfant; 22220 Landreger / Tréguier

NEVEZ!

Gounezit amzer: lakait ho anv en linenn gant al liamm-mañ:

<https://framaforms.org/keav-brezhoneg-er-familhou-nevez-amzer-2024-1708081634>

Tud deuet

Anv-familh	Anv-bihan
.....
.....

Chomlec'h : Kod-post : Kêr :

Chomlec'h elektronek :

Niverenn(où) pellgomz : ha

Bugale

Anv-familh	Anv-bihan	Ganet d' .../.../...	Oad	Skoliataet e brezhoneg ?	Hentad ar skol
				Ya <input type="checkbox"/> Ket <input type="checkbox"/>	Diwan <input type="checkbox"/> Prev. <input type="checkbox"/> Pub. <input type="checkbox"/>
				Ya <input type="checkbox"/> Ket <input type="checkbox"/>	Diwan <input type="checkbox"/> Prev. <input type="checkbox"/> Pub. <input type="checkbox"/>
				Ya <input type="checkbox"/> Ket <input type="checkbox"/>	Diwan <input type="checkbox"/> Prev. <input type="checkbox"/> Pub. <input type="checkbox"/>
				Ya <input type="checkbox"/> Ket <input type="checkbox"/>	Diwan <input type="checkbox"/> Prev. <input type="checkbox"/> Pub. <input type="checkbox"/>

Doare-lojañ: **Ti-vakañsoù**

Tachenn-gampiñ (Karr-kampiñ pe deltenn)

	ya	ket
Bod : (Evit an dud o kousket er savadur hepken) Mat e vo din kousket gant tud all er gambr. Kambrou 2 betek 6 a zo. Ma respontant "ket" e komprenan ne vin ket priorek evit kaout ur plas ma n'eus ket ken a gambrou bihan.	<input type="checkbox"/>	<input type="checkbox"/>
Dont a rin dre ar stummadur dibaouez (formation continue)	<input type="checkbox"/>	<input type="checkbox"/>
Tud nammet (mont e darempred ganimp evit studial ho koulenn hag an ezhommoù kempouezhañ)	<input type="checkbox"/>	<input type="checkbox"/>
Son: Dont a rin gant ur benveg sonerezh:	<input type="checkbox"/>	<input type="checkbox"/>
Yec'hed : Allergiezh pe angougemer (<i>intolérant</i>) ouzh tra-mañ-tra.	<input type="checkbox"/>	<input type="checkbox"/>
Aotren a ran KEAV da boltrediñ, filmañ an dud, gour ha bugale evit o zeulioù brudañ hag o lec'hiennoù.	<input type="checkbox"/>	<input type="checkbox"/>

Deiziad:

Sinañ:



Dibenn-sizhun e brezhoneg evit ar familhoù hag an dud gour a zeuio hep bugel

Deuit HOLL evit kaout plijadur en ul lec'h kaer ha degemerus !

Eus ar Gwener 5 d'ar Sul 7 a viz Ebrel 2024 e vo dalc'het ur staj e PERWENAN gant KEAV. Pal ar staj zo sikour ar familhoù da gaozeal brezhoneg etrezo : ar vugale, ar vugaligoù hag o zud a oar un tamm brezhoneg, un tamm mat a vrezhoneg zoken, met n'eo ken aezet a se atav kaozeal brezhoneg er familh pa vezer krog da gaozeal galleg.

D'ar familhoù a gomz brezhoneg etrezo disoursi e vo un doare da vevañ e brezhoneg en un endro plijus, ober anaoudegezh gant familhoù nevez ha sikour ar familhoù all.

C'hoarioù a vo graet etre ar vugale, evito d'ober anaoudegezh an eil gant egile, ha kalz a obererezhioù e brezhoneg, bugale hag o zud asambles : c'hoarioù a bep seurt, pourmen, kanañ, dañsal, labour- dorn, beilhadegoù....

D'an dud gour a zeuio hep bugel e vo kinniget kemer perzh en obererezhioù ar familhoù da vareoù zo ha d'ar mareoù all e vo kinniget dezho obererezhioù a-ratozh evito, baleadennoù natur gant pep e dem, kejañ gant brezhonegerien ar vro, ha nozvezhioù laouen !

Atav ez eus bet graet ur plas d'ar vugale ha d'o familhoù e kampoù KEAV. Met, er mare-mañ, muioc'h eget ma oa bet biskoazh, eo a bouez bras sikour ar familhoù en o strivoù d'ober eus ar brezhoneg o yezh... Dazont ar yezh zo e familhoù ar vrezhonegerien. Pa vez kaozeet brezhoneg gant ar vugale en o familhoù, e teskont o yezh tamm-ha-tamm, e karont anezhi, hag e vezont prest da vont hardi, dizaon, e bed ar galleg pe ar saozneg hep disoñjal ar brezhoneg...

Ar brezhoneg er skol zo un dra vat, met ma ne vez ket kaozeet brezhoneg er familhoù, n'eo nemet un touell.... Abalamour da se e lavaromp : e pep korn-bro e rankomp aozañ stajoù brezhoneg evit ar vugale hag o familhoù. E pep korn-bro hag aliesoc'h-aliesañ !

Lakaat ar vugale, o zud ha tud gour all da vevañ asambles e brezhoneg a zo un doare da ziskouez eo ar brezhoneg yezh ar gevredigezh, yezh an holl.

Gwelet ar vugale ha komz ganto, evit an dud gour eo bevañ ar brouenn ez eus un dazont d'ar brezhoneg ; evit ar vugale, gwelet tud all estreget o zud o komz brezhoneg a zo meizañ e c'hall ar brezhoneg bezañ yezh ur gevredigezh. Abalamour da se e tegemerimp ivez tud gour ha n'eus bugel ebet gante. Plijadur da gomz gant tud all ha gant bugale o devo, ha gant brezhonegerien tro-dro da bPerwenan ivez.

**Deuit niverus d'an dibenn-sizhun brezhoneg e Perwenan,
d'ar Gwener 5, Sadorn 6, ha Sul 7 a viz Ebrel 2024
da c'hoari ha da vevañ e brezhoneg !**